

Estez miz Mezheven 2007

Diplom Broadel ar Breved

RUMMAD AR SKOLAJOU

Opsion : LV2

Amprouennoù

Istor - Geografiezh

Deskadurezh ar c'heodedour

2 eurvezh

Ar sujed-mañ zo 8 pajenn anezhañ :

- Lodenn gentañ notet war 18 poent :

DA CHOAZ

- ar sujed N°1 niverennet eus ar bajenn 2/8 d'an hini 3/8
- ar sujed N°2 niverennet eus ar bajenn 4/8 d'an hini 5/8

- Eil lodenn notet war 12 poent :

- ar sujed niverennet eus 6/8 da 7/8

- Trede lodenn notet war 6 poent :

- ar sujed niverennet 8/8 (da reiñ en-dro gant ho kopienn)

Barregezh skrivañ (reizhskrivadur ha doare d'en em zisplegañ) : 4 foent

Code examen : 7DNBCH1

Diplôme National du Brevet

Série Collège

Sujet

S 2007

- 1/8 -


LODENN GENTAÑ : ISTOR – GEOGRAFIEZH

SUJED N°1 : diskar ar bed komunour en Europa adalek 1989

Diell 1 : Penn kentañ dispenn moger Berlin (13 a viz Mezheven 1990) goude he diskar e 1989



Document 2 : Dispenn ar bed komunour goude 1989



Diell 3 : Mikhaïl Gorbatchev, prezidant URSS eus 1985 da 1991, o tilezel e garg

Lakaat a ran un termen d'am c'hargoù prezidant an URSS. [...] Pa'z eo ar wech diwezhañ din komz ouzhoc'h [...] e kav din ez eo ret mat lavaret deoc'h ma soñj war ar pezh zo bet graet abaoe 1985. [...] Tapet he deus ar gevredigezh he frankiz, ha se war tachennoù ar politikerezh hag ar spered. [...] Distrujet eo bet [...] ar sistem totaliter.

Toullet hon eus an hent d'an demokratelezh. An dilennadegoù libr, frankiz ar c'hazetenniñ, ar frankizoù relijiel, ensavadurioù ¹ demokratel hag al liesstrolladegzh a zo deuet da wir. Gwirioù Mab-den zo lakaet da reolenn veur.

E-barzh ur bed nevez emamp o vevañ. Echu eo ar brezel yen. N'eus dañjer ebet da gaout ur brezel bed all. Paouezet ez eus [...] gant redadeg an armañ hag ar militarizadur diboell en deus dinaturet hon ekonomiezh.

[...] Digoret omp war ar bed, n'eomp ket ken da emellout ouzh aferioù ar re all ha ne reomp ket ken gant hon nerzhioù-brezel er-maez eus hon bro. Fiziañs, kengred ha doujañs eo ar respontoù zo bet graet dimp. Deuet omp da vezañ unan eus pileroù meur adaozadur ar sevenadur a-vremañ hervez reolennoù ar peoc'h hag an demokratelezh.

Tapet ez eus bet gant ar pobloù hag ar broadoù ur gwir frankiz, dezho da zibab o aotodeterminadur.

Mikhaïl GORBATCHEV, *prezegenn er radio hag en tele (25/12/1991) hag embannet war Le Monde (26/12/1991)*

1. institutions

GOULENNOÙ - 8 poent

Dielloù 1 ha 2

1. Daou zarvoud zo bet degouezhet en Alamagn diwar diskar ar gomunouriezh, pere int ?

Diell 2

2. Peseurt tri cheñchamant zo deuet en Europa diwar diskar ar gomunouriezh goude 1989 ?
(*tri respont zo gortozet*)

Diell 3

3. Menegit div skouer eus ar cheñchamantoù politikel zo bet en URSS etre 1985 ha 1991. Peseurt cheñchamant bras zo en em gavet en darempredoù etre ar Reter hag ar C'hornôg ?

PENNAD ARGUZIÑ - 10 poent


Diwar an titouroù ho po tennet diouzh an dielloù ha gant ar pezh ho po desket, savit ur pennad-arguziñ un ugent linennad bennak hag a ziskouezo penaos eo bet eilpennet¹ Europa hag an darempredoù etre ar Reter hag ar C'hornôg gant diskar ar bed komunour.

1. bouleversé

LODENN GENTAÑ : ISTOR – GEOGRAFIEZH

SUJED N°2 : Kemmoù an industriezh gall

Diell 1 : Spasoù an industriezh gall



Diell 2 : An Nord-Pas-de-Calais zo deuet a-benn da adneveshaat e industriezh

Ar rannvro a zeu eus pell. En ur ober un nebeud dek-vloazioù he deus kollet industriezh ar glaou, hini ar siderurgiezh ha hini an industriezhioù-gwiadañ, tri gennad ma oa savet he galloud warno. Hiziv eo sac'het he diskar. Amzer gozh hec'h industriezh hag he flas eus ar c'hentañ e kreiz Europa o deus graet kalz evit an Nord-Pas-de-Calais. War-du broioù ar minoù hag ar siderurgiezh eo deuet ar broduerien otoioù meur [...].

Mont a ra an transportoù war gresk : 13 milion tonenn a varc'hadourezh zo tremenet dre an tunel dindan Mor-Breizh e 1999 ; ar c'has-degas¹ dre gontenerien a c'hwez e Dunkerque koulz hag er porzhioù-stêr [...]. Gant ouzhpenn 29000 a dud gopret ez eo anat ez eo hiziv galloudusoc'h-galloudus teknologiezhioù ar c'helaouiñ hag ar c'hehentiñ² e Lille ha Valenciennes.

J.-P. Dufour, *Le Monde*, 30 a viz kerzu 2000

1. trafic
2. technologies de l'information et de la communication

Diell 3 : Paris-La Défense, kentañ teknopolenn er Frañs

Adalek an Défense, e kornôg Pariz, betek kêr nevez Saint-Quentin-en-Yvelines ez eus savet bern war vern kement a greizennoù klaskerezh, skolioù-meur ha skolioù-uhel ma c'heller ober anv eus ur Silicon Valley mod gall. Aze ez a an traoù en dro dre rouedadoù gant ar c'haskerezh diazez¹, ar c'haskerezh-diorroiñ² hag an industriezh, ar c'haskerezh-stad hag ar c'haskerezh privez, ar gennad sivil ha hini an arme, strolladoù meur an industriezh ha kantoù a embregerezhioù bihan ha krenn (PME); [...] En dro dezho ez eus ganet ur c'hemplez arme hag industriezh³ savet war an nukleel, an aerspas, an elektronek hag an urzhiaterezh a ra al liamm gant ar strolladoù industriezh Thomson, Alcatel, Dassault [...]. Meur a hent-bras evel an A86, ar Francilienne, an A10 a ra an daremprediñ etre an holl lec'hioù-se.

J. Scheibling, *L'industrie*, Documentation photographique, miz kerzu 1999

1. la recherche fondamentale
2. la recherche-développement
3. complexe militaro-industriel

GOULENNOÙ - 8 poent

Dielloù 1 ha 2

1. Pelec'h en em gave broioù kozh an industriezh e Frañs ? Ha petra a veze produet eno (*tri respont zo gortozet*) ?

Diell 3

2. Menegit tri zra a ziskouez petra eo un deknopolenn.

Dielloù 1, 2 ha 3

3. Menegit tri zra a zispleg perak ez a an industriezhioù nevez d'en em staliañ d'ul lec'h kentoc'h evit d'unan all.

PENNAD ARGUZIÑ - 10 poent

Diwar an titouroù ho po tennet diouzh an dielloù ha gant ar pezh ho po desket, savit ur pennad-arguziñ un ugent linennad bennak hag a ziskouezo kemmoù an industriezh gall ha dilerc'hioù¹ ar c'hemmoù-se war lec'hiadur ar spasoù industriel.

1. conséquences

EIL LODENN : DESKADUREZH AR C'HEODEDOUR

SUJED : An Difenn broadel


Diell 1 : Lezenn an 28/10/1997 war reform ar servij broadel, embannet gant prezidant ar Republik.

Mellad. L111-1 : Ar geodedourien a gemer perzh e difenn o Broad. Dre ar servij broadel evit an holl e vez sevenet an dever-mañ.

Mellad. L111-2 : Ar servij broadel evit an holl a zo : an niveradeg, an devezh prientiñ d'an difenn hag ar galv dindan an armoù.

Mellad L112-2 : Ne vezer ket galvet dindan an armoù ken (...) Ar galv-se a c'hell bezañ adlakaet en dro hervez al lezenn diouzhtu ma en em gav ar Vroad da vezañ difennet.

Diell 2 : Kefridioù nerzhioù-brezel Frañs.



1. *prévention*
2. *catastrophe*

(E *Objectif citoyen*, Editions Glénat 2003)

Diell 3 : Bonreizh ar V^{vet} Republik (1958)

Mellad. 5 : Gwarantiñ a ra Prezidant ar Republik an dizalc'helezh broadel, unanded an tiriad broadel hag an doujañ d'an tetedoù.

Mellad. 15 : E penn an armeoù emañ prezidant ar Republik.

Mellad. 34 : El lezenn emañ ar reolennoù (...) a red pep keodedour da vezañ suj d'an Difenn broadel evitañ hag evit e vadoù (...) Lavaret a ra pere eo reolennoù diazez aozadur meur an Difenn broadel.

Mellad. 35 : Aotreet eo an diskleriañ brezel gant ar Parlamant.

GOULENNOÙ - 4 foent

Diell 1

1. Pere eo an tri zra a ranker ober evit ar servij broadel hervez lezenn an 28/10/1997 ?

Diell 2

2. Pere eo kefridioù an arme gall hervez ar vandenn-dreset-mañ ?
(*tri respont zo gortozet*)

Dielloù 2 ha 3

3. E-barzh peseurt melladoù ez eus anv eus galloudoù prezidant ar Republik evit a sell an Difenn ?

PENNAD ARGUZIÑ - 8 poent

En ur gemer harp war titouroù an dielloù ha war skouerioù dibabet ganeoc'h, e savoc'h ur pennad-arguziñ ur pemzek linennad bennak a ziskouezo eo aozet an Difenn broadel hervez al lezenn hag ar Vonreizh ha penaos ez eo liesseurt ar c'hefridioù anezhañ.

DA REIÑ GANT HO KOPIENN AMPROUENN

TREDE LODENN : KAVOUT E VERKOÙ EN AMZER HA WAR AN DOUAR

Memor ha glad

. **GOULENN 1 : Skrivit deiziadoù resis an darvoudoù lakaet war wel er mirdioù-mañ.**

MIRDIOÙ	DEIZ, MIZ HA BLOAZ AN DARVOUD
1. E Memorial Caen e c'heller klevet un enrolladenn eus galv ar jeneral De Gaulle .	
2. E mirdi an Dispac'h kastell Vizille e c'heller gwelet ur vaketenn a zegas soñj diouzh an deiz ma oa bet kemeret ar Bastille .	
3. E koadeg Rethondes e c'heller gwelet ar wetur a oa bet sinet enni Arsav-brezel ar Brezel bed kentañ.	

. **GOULENN 2 : Adkavit an darvoudoù a zegas soñj deoc'h diouzh an deiziadoù stag ouzh al lec'hioù istorel-mañ.**

LEC'HIOÙ ha PRANTADOÙ ISTOREL	DARVOUDOÙ
1. E Su Dijon ez eus un arkeodrom a ziskouez petra oa bet an emgann tremenet eno e 52 kent JK .	
2. E Senlis ez eas un Aotrou da roue e 987 .	
3. E Pariz, e porzh an Invalides, e oa bet dic'hradet un ofiser gall e 1898 .	

. **GOULENN 3 : War ar gartenn, skrivit er c'helc'hioù niverennoù ar c'hêrbennoù a zo lec'hioù glad pe istorel meur enno.**

Lec'h ha KÊR-BENN	NIVERENN da lakaat	Lec'h ha KÊR-BENN	NIVERENN da lakaat
Ar Parthenon en ATEN	1	Ar vorganezig e KOPENHAGEN	4
Ar c'h-Colosseum e ROMA	2	Ar Prado e MADRID	5
Buckingham Palace e LONDREZ	3	Dor Brandebourg e BERLIN	6

